

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù – Ronds et rondes simples

Son ar vestrez Koant

Rimimi mon frère

Me 'zo o vont da fortunañ, o rimimi mon frère,
Ha me ne ran ket ken nemet gouelañ.

Rimini mon frère la, coucou merc'hed Tremenac'h

Va mestrez he deus kalz arc'hant,
Met allaz, allaz n'eo ket koant.

He daoulagad ruz ha pikous,
Zo heñvel ouzh re ur marmouz.

He divskouarn a zo melen,
Heñvel ouzh div grampouezenn.

He fri zo ken hir ken tev,
Ha tour an iliz e Rosko.

E div fronell leun a vutun,
A ranker karzhañ bep sizhun.

Pa sellan ouzh glaour he genoù,
E krenan dirak he skilfoù.

Pedit evidon mignoned,
M'em eus aon da vezañ debret.

N'eus ket er vro ur varrikenn,
Ken pounner ha va berjelenn.

Pa daol he zroad war an douar,
E c'holo daou pe dri hent karr.

He divesker en he loeroù,
A zo ken tev ha ribotoù.

Penaos e pado va buhez,
Gant ur plankenn evel honnezh !

Paotred pa c'hoanteoc'h fortunañ,
Klaskit karantez da gentañ.

Oh ! me rank mont da skuilh(añ) daeloù,
Oh ! me zo klañv va c'harvelloù.

Paotr Tréouré (Auguste Conq)